

SERVIJ KEODEDEL EVIT GBB 2023

*Kemer perzh e aozadur Gouel Broadel ar Brezhoneg
Adalek ar 1añ a viz C’hwever evit 6 pe 8 miz
(35e/sizhun), e Gwened.*

Emañ ar gevredigezh Mignoned ar Brezhoneg o klask un den youlek evit ur servij keodedel.

Aozañ a reomp bep daou vloaz tri devezh festival evit ar brezhoneg : GBB. E 2023 e vo ar gouel e Langoned (56) **eus an 30 a viz Even d’an 2 a viz Gouere**. Un abeg eo evit diskouez pep tra nevez krouet e brezhoneg eo ar gouel-mañ hag a zo aozet gant izili ar gevredigezh : sonerezh, sinema, c’hoariva, arzoù er straed, darvoudoù evit ar vugale met ivez taolioù-krenn, niverel, ekonomiezh...

Ma vezout dindan 25 bloaz hag ez peus c’hoant da vevañ ur sapre taol-kaer e brezhoneg, deus davedomp !

E-touez palioù ar gefridi ha gant skoazell ar skipailh gopridi hag an izili aozet e bodoù-labour, ez po d’ober war-dro :

- **Skoazell sevel skipailhoù tud a-youl vat** (tutañ, sevel ar planning, kelaouiñ) ha kemer perzh d’ar burevioù-pad kelaouiñ e Langoned. Degemer ar re a-youl vat e-pad ar gouel.

- **Skoazell aozañ al leurenn-lañs “An Taol-Lañs”** : skignañ ar galv, kinnig ar raktres e liseoù, kemer perzh en emgavioù gant ar strolladoù evit gouzout hiroc’h diwar-benn o raktres.

- **Skoazell aozañ ur marc’had artizanel ha buheziñ** war kêriadenn ar c’hevredigezhioù anvet “kêriadenn ar brezhoneg” : galv da gemer perzh, heuliañ en enrolladennoù, kenaozañ an abadennoù, raksoñjal an ezhommoù a-fed tud ha dafar, krouiñ dafar kinklañ...

- **Kemer perzh er festival evit ma tremenfe pep tra mat.**

Tro ‘po da labourat war da raktres micherel e-pad amzer ar servij keodedel ma fell dit. Kinniget vo dit bezañ stummet evit implijout binvioù merañ implij amzer, binvioù graferezh, dizoloiñ mont-en-dro ur gevredigezh.

Labouret e vo da gentañ e brezhoneg. Ma vez komzet brezhoneg ganit e vo aesoc’h. N’eo ket strikt ma n’eo ket uhel da live. Dre soubidigezh e vi ganeomp hag e kresko buan-tre da live :)

Kae war service-civique.gouv.fr/ evit lenn ar c’hinnig a bez ha na chom ket etre daou ma peus goulennoù a-raok lakaat da anv.

Mignoned ar Brezhoneg
3 rue de la loi - 56000 Gwened

darempred@mignoned.bzh
06 11 70 65 92
www.mignoned.bzh

Dizoloiñ ar festival
www.gbb.bzh



SERVICE CIVIQUE POUR GBB 2023

*Participer à l'organisation du festival
de la langue bretonne. À partir du 1er février
et pour une durée de 6 à 8 mois (35h/semaine), à Vannes.*

L'association Mignoned ar brezhoneg cherche un ou une volontaire en service civique.

L'association organise tous les deux ans, trois jours de festival pour la langue bretonne : GBB. En 2023, l'évènement aura lieu à Langonnet (56) **du 30 juin au 2 juillet**. Ce festival, organisé par ses bénévoles, se veut le témoin de tout ce qui se crée de nouveau en langue bretonne : musique, cinéma, théâtre, art de rue, spectacles jeunesse, mais aussi sujets de société, numérique, économie...

Si tu as moins de 25 ans et que tu te sens proche de la langue bretonne, contacte-nous !

Dans le cadre de ta participation à l'organisation du festival GBB, en lien avec l'équipe salariée et les commissions de travail gérées par les membres de l'association, tu auras pour mission :

• **Aider à la constitution d'équipes de bénévoles** (recrutement, planning, informations), participer aux permanences d'informations du festival à Langonnet. Accueil des bénévoles lors du festival.

- **Participer à l'organisation du tremplin musical "An Taol-Lañs"**: diffusion de l'appel aux candidatures, participation à la sensibilisation dans les lycées, participation aux réunions avec les groupes pour définir leur projet
- **Aider à la mise en place du marché artisanal et des animations** sur le village associatif "kêriadenn ar brezhoneg": appel à participation, suivi des inscriptions, accompagnés les projets d'animation, anticiper les moyens humains et matériels nécessaires, réalisation d'éléments décoratifs...
- **Participer au bon déroulement des événements pendant le festival.**

Cette mission sera également l'occasion, si tu le souhaites, de travailler à ton projet professionnel, de te former à l'utilisation d'outils de gestion de planning et d'outils de création graphique, de découvrir le fonctionnement d'une association.

La langue de travail principale est le breton. Donc si tu parles breton ou si tu as pour projet de l'apprendre, c'est mieux :)

Retrouve l'offre sur service-civique.gouv.fr/ et n'hésite pas à nous téléphoner si tu as des questions avant de postuler.

Mignoned ar Brezhoneg
3 rue de la loi - 56000 Gwened

darempred@mignoned.bzh
06 11 70 65 92
www.mignoned.bzh

Découvrir le festival
www.gbb.bzh

